


CHANSON NEVEZ VAR SUJET EUR MARTOLOD AG E VESTRES

Var don : *Ma Petite Jeannette.*



Tud yaouanc tostoït da glevet
Eur son so neve composet
A so savet vit ar bla,
Entre daou d~~m~~ yaouanc,
Ag à deuo daou gant joa,
A beb eill da bartant.

(bis).

AR MARTOLOD, outan e unan

Me a zo eur mortolod yaouanc
Allas ne m'eus na tad na mam
Zo ruillet a diruillet,
Bars an créis ar mor don,
Allies ar boan speret
A ra din poan galon.
A c'hoas ar boan se ne d'he netra
Oh, en qever an ini m'o c'hoas,
D'eus abers eur plac'h yaouanc,
Siouas m'eus rë garet,
Rag erve va zantimant,
Vijemp quet separat.

(bis).

Mes eur c'helou o m'eus recevet,
Ag a ra din cals a boan speret
Laret so din abers mad,
Penos n'am c'harie qet.
Ag e rë diouin me goab,
A c'hoas ne oëlent qet.

(bis).

Mar d'he gouir ar pêç a m'eus clevet
Var c'halon baour a vo glac'haret,
Mes qent donet da gredi,
Eur c'helou qet barbar,
Vo rëd din en approuvi,
Arog demer glac'har.

(bis).

Me c'hoënnou eur bermision,
Ag a c'hayo sur dre drahison,
Me a eruo er vro
Ep bea bet goëlet
A neuze me a velo,
Ag en vin trahisset.

(bis).

Cetu me eru ebars er vro,
Oh daoust a peno e vo an dro,
Goëlet ran ün den yaouanc.
O tiserei d'eus e zi,
Breman me avel patant,
E m'ho divar va fri.

(bis).

Mes n'eus forç rëd a ve din monet,
A ganti me a renqo prezeg,
D'eus a lavaro va mestress,
Me sur e resporto,
Gant cals a hardieguez,
Demeus o freposiou.

(bis).

AR MORTOLOD, d'oc'h antren e ti e vestres.

Debonjour a joa va douç Jannet
Pell bras so ne m'eus qet o coëlet
Cleven qen d'eus o qelou
Var bont va batimant,
Velen qen o lizerou
Me a m'oa n'hehamant.

(bis).

AR PLAC'H
Estonet bras on deus o coëlet
A cals muioc'h c'hoas deus o clevet
Ma ne scrifec'h qet d'ec'h,
C'houi ne scrifec'h qet din,
Ag eveldoc'h me moa lec'h,
Da gaout cals a zourgi.

11.232

(bis).

AR MARTOLOD

Ya guir mad é ar peç a laret,
Mes credi a ran p'eut va zromplet,
Clevet m'eus bet abeurs mad,
Var glaz a lizerou.
Penos rec'h diouzin goab
Pa oan pell d'euz ar vro.

(bis).

AR PLAC'H

Oh, na mar gue dre foss qeloyou
P'eut recevet var o lizerou
Oc'h deut abeteg aman,
Evit va approuvi,
C'hom tranquil d'ec'h a laran
Deut qen d'am frecanti.

(bis).

AR MARTOLOD

Cals a raison a peut va mestres
Rag me n'ho carin qen sur james
N'he qet clevet gant tud all.
E bet din er reson,
Rag me aboe an deis all.
Oëte oa trahison.

(bis).

AR PLAC'H

Où, trahison sur me na ren qet
Mes dec'hui me na zemein-qet
Rag goëlet a ran certen,
Dirag va daoulagat,
Penos p'eut d'eus o touguen,
Eur marc'h ag a vale mad

(bis).

AR MARTOLOD

Var gezec me ne valean qet
Var ar plench me ne lavaran qet
Mes c'houi greg d'eur martolod,
Ne nefet birviquen.
Pe otramant e de lod,
De m'eus ar chench souben.

(bis).

AR PLAC'H

Nan martolod me ne gemerint quet,
Rag aon na ven-me ampoësonet,
Santout ran gant o tillat.
Me grëd c'hoes ar godron,
Va c'halon ne all qet pad,
N'ho qever ma mignon.

(bis).

AR MARTOLOD

Penos ta plac'h yaouanc dilicat
Choës ar godron a zo eur c'hoës vad
Dour godron a ve roët.
Da merc'het eveld'oc'h,
Evit espern o yec'het,
Ag e vent cals crenvoc'h.

(bis).

AR PLAC'H

Petra livirit din martolod
C'houi am c'hemer evit bea sod.
Dour godron ve qet roet,
Met dand dud potriner,
A me n'hon qet ententet,
Dalhit o louzeier.

(bis).

AR MARTOLOD

Oh, Jannedic potriner oc'h sur
D'eus a ze dec'h me en assur,
Var e pisach e merqet,
Liou a pevar blanquen,
O taoulagad coarennet,
O tauarn so melen.

(bis).

AR PLAC'H

Lavarit din evel ma qerfet
Martolod me ne gemenin qet.
Rag cals ac'hanc'h a ve
Sotissou en o fenn,
A zong d'he ve o graguez,
O lampat er vouillen.

(bis).

AR MARTOLOD

O nebon bea zo cals anhe,
Ag a blichefe d'he ober se,
Mes c'houi plac'h yaouang charmant
Gant an oll admiret.
C'houi choaso ep nehamant,
An ini a garfet.

(bis).

AR PLAC'H

Ya me a choaso eur micherour,
A ne ieio qet a us dan dour
A ne m'ho nep nehamant,
Qen neubeut poan speret,
Pa deuio bariou tourmant,
Gant aon na ve beuet.

(bis).

AR MARTOLOD

Ya neuze n'eur gafel evnurus,
Mes un tamie vefet morc'hedus
A mar labour bar er ger,
C'houi chomo tost dean,
Casi vel eur gos comer,
Da zellet diontan.

(bis).

AR PLAC'H *droug enni*

Arça martolod clevit eta,
A n'he qet poënt dec'h echui c'hoa.
It da glasc o patimant,
So en creis ar mor bras.
Rag erve va zantimant,
Me n'he d'apfoc'h qet c'hoas.

(bis).

AR MARTOLOD, *o cuitat e vestres*

Neuze eta plac'h yaouane traïour
E c'han da bartia var an dour,
En lec'h ma vin rusquellez,
Tolet a distolet,
Ne laquin qen va speret,
Da zongeal er merc'het,

(bis).

AVIS

Me o pëd martolodet yaouane,
Oh, ne laquit qet o zantimant,
Da zongeal n'ho mestrezet,
Gant re a garante,
Pe elvedon vefet tromplet,
Ag o po queus goude.

(bis).

FIN.

DISPUT NEVEZ ENTRE YAN A JANNET DIVAR BEN AN DEMEI

(Var eun ton joaüs).

Me o ped oll bretonet, da selaou eun disput,
A laquaïo da c'hoarsin, eun nomb bras d'eus a dud
Savet tre Yan a Jannet, var ar brieles,
O daou e oant contant bras, da antren e vruries.

YAN

Arça eta Jeanedic, cetu deut molarge,
Gommanço an dud yaouanc da vale adare,
Mes me oa goelloc'h gamen, ma qeret consanti.
Ni mijem bet coseet, var sujet demezi.

JANNET

O ya da eme Jannet, me so contant a ze,
Me so scuis o servicha, me c'houl va liberte,
Ag a zimeo dec'h Yan, gant joa vrás em c'halon,
Pa gerfet c'hemp assambles, beteg ti ar person.

YAN

Mes arog commanç netra vo red mad demp goelez,
Penos formi or menag, entended mad Jannet,
Pa c'her briedeles, ve eur scoulm da ober,
Ag an ini capapla n'hel qet en disozer.

JANNET

Oh ya reson a p'eut Yan red mad vo demp goelet,
Penos e qerso an traon, goude vemp demeet,
C'houi c'haio da zevega, po deg goennec bemde,
A me a mo seis pe eis ive deus va c'hoste.

YAN

Oh, neuze avad Jannet, ma ve gouir qement-se,
Ni zestumo cals arc'hant da laqat a goste.
Mes pelec'h c'hafemp da chom, larit din Jannet,
Rag o clasqt logement, e vefomp goel nebet.

JANNET

O c'hui so diod Yannic, a nouzoc'h qet erfad,
Enti Vari C'hlasiou, tostic da di va zad,
Eno var eur toc'het vias neur variqen didal,
Me a gred penos Yannic eno yefomp qet fall.

YAN

Oh, eur variqen didal, penos e vo placet,
Penos e chomo eno, ma na ve qet staguet,
Rag pa raio avel grenv, vemp tolet ac'hane,
D'an traon divar ar roc'hel, e colfomp om bue.

JANNET

O ya staguet mad e vo, gant eur varen houarn,
A d'eus an tu vo n'havel, ni droi gant om daouarn,
Mes lavarit d'in Yannic pelec'h vo roed monet,
Evid elasc ar goaligner, aben de an eured.

YAN

Va se eta Jannedic, en em dransportet qet,
Me choaso dec'h eur oalen, aben de oc'h eured,
Na vo qet en diamant, en arc'hant n'ag en aour,
Rag a reze n'in qet mad, vit eurusji ar paour.

Me ielo ganec'h Jannet, da di eur panerer,
Ennes a n'eus bar ne di, danv cals goaligner,
A reio gred gand ozill, easi en liou d'an aour,
Goaligner d'eus ar sort-se, Jannet, so vit ar paour.

JANNET

Evideomp mar demean, ranquin bea cleriet,
Bars an aour pe en arc'hant, rog ma vin eureujet,
A non pas d'eus goaligner, gret gant tamou ozill,
Ententit ervad Yannic, me mo quet a draou vil.

YAN

Ya rëson apeut Jannet, vit an ini elle cat,
Eur oalen aour pe arc'hant, certen so un dra vad,
Goude vefet demeet, petra rai ar reze,
Var o pis met o sicour da frita paourente.

Neuze vo rëd o goëza, evit cat un tam boët,
Un anter just nebeutec'h, evit pa oan prenet,
Mes larit din c'hoas Jannet, mar or be bugale,
Da belec'h vo rëd demd mont vin clasq haniou d'he.

JANNET

Tavit var se choas Yannic, abrëd ma om da ze,
Aben neuze vo er vro, cals anoiou neve,
A ma na vent qet et tout, neuze ni a choaso,
Anoiou d'ar bugale, ar c'haëra vo er vro,

YAN

Mes breman pa m'eump comzet, un tam ve or stadou,
E vanq d'emp en em glevet ize var or madou,
Rag me paour qes Jannedic, a zo goëll baour breman,
Na meus evit mobilier, nemet neubet a dra.

M'eus met un anter goële roët din gant va man,
Dillat da laqat varn'han, sioas choas ne m'eus tam.
Besseliou d'ober ar boëd, vo rëd demp cat ive,
Rag me ne m'eus nétra tout, demeus a gement se.

JANNET

Oh, Yannic va mignon ger, m'ho pët n'em genet qet,
Rag besseliou d'ober boëd, dec'hui ne vanco qet,
Rag eno var ar roc'hel, formin eur choudouren,
A vo mad d'emp d'ober iod, a da ober souben.

Laoiou a gafomp ive, a na vont get goël ger
Gant tamou coat ni raio, pa m'omp un tam amzer,
Erfin an traou tout a vo accomod evidomp.
Nemet da gerc'hat an dour, ne on pelec'h c'hesomp

YAN

An dour avaq Jannedic, me bromet vanco qet,
Cals esetoc'h vit bara, d'ec'h a vo pourveet,
Me raio un toul er roc'h a chomo dour ennan,
Qercouls en creis an domder, vel en creis ar gouan.

JANNET

Oh, c'houi so un den Yannic, n'eus qet oëll evidoc'h,
A pa renfet tro ar bëd, ne gafen nemet oc'h,
Ave qen ezet a c'houi, cavet d'ober on tan,
Mes var sujet om euret, coseomp ta breman.

YAN

Me ne mo bet cals a dud, evit va assista,
A c'hoas ar pëc a deuio, ne refont quet cals tra,
Ma na gossont qet gante, bars en o godellou,
Me a bromet dec'h Jannet vo bian o fronfour.

JANNET

Goël baour e zo e ligne, evel ma lavarit,
Ag a re d'eus va c'hoste, von qet ive pinvig,
Me lavarfe un dra d'ec'h Yannic mad a gafen,
E vefe grëd om eured, ep lavaret da zen.

YAN

Oh rëson a p'eut Jannet, o lare qement se,
Neuze c'homfe tout ganemp, mar qeromp ober se,
Ma na memp qet a brofit, coll na n'omp qet ive,
Lezomp pehini c'hanom, e famill agoste.

JANNET

Allon ta ma Yannic, demp da di ar person,
A ni deut da finissa, evelse om chanson,
N'eur ober pëc m'eump laret, bea fidel goude,
Ag e vefomp evirus, beteg fin or bue.

Neuze n'omp pligeadur vrás, o veva essembles,
Bar en em lochen neve, beteg fin or bue,
Eno pell d'eus a bartout, ni ello contempli,
An douar ag an envou, a donet de meuli.

FIN

GUERZ FANCHIQ MA MIGNON

Var ton : Va Flanéden zo Caled.



Tostaît o tud yaouanq, ha quemerit true
Ouz ar blaneder bonner aboez var va bues
Deut da guemesq hotaleou assemblez gant vare
Da soulagi va foanniou deut da voela varne.

Cetu deg vloas tremenet ma zon bet contraignet
D'abandonni, va c'heront, va douç va mignonet,
Evit mouet d'ar bresel da zougouen an armo.
E faveur liberte voa prometet d'ambro.

A boue quet allamzer n'alfenquet lavaret,
Pet combat ha poanniou ameus me anduret,
Tri c'chant leo am separe eus va c'herent nessa
Ha na meus bet diouto quélou andistera

E creiz ar c'harnach bemdeva briez exposet
Unan demeus va diou vrec'h er fin a meus collet,
Hac evit oll recompanç emeus bet va c'honje,
Hep receo nep pansion da veva em c'chontre.

C'hoas laouen o tilen el servich ar Republic,
N'en deo qet dent wa speret da gompreñ er satiq
Eus an en hir ha poanieus am boa me da pler.
Aroc guelet va zud quér hac erru out er guer.

Collet emeus ar gallout da rei sicour d'am zad,
Hac o tivoeret va brec'h, n'allin mui labourat,
Brêma va zud am mago, pa meus me c'hoas ar chanc
Mo deus leve ha arc'hant ebars en abondanc.

Cetu me dijà erru tostic demeus ar guer.
Gant ar joa ouz va gueillet an olla ray din cher,
Va zad, va mam, va c'herent, breudeur, ar c'hoarezet
Ha va mestrezic fidel a vo oll ravisset.

Bonjour dec'h o va c'chontre ; euras en em garan.
Gallout c'hoas o contempli : dont da vervel aman,
Va c'halon gant ar joa vrás em c'kreiz zo seriet.
O tostad demeus an ty e lec'h mont bet ganet.

Mes oc'h antreal enni, e zont bet trubuilhet,
Un den di anar din me e deuz din lavaret,
Eru e fall oc'h aman, sortiet va mignon.
Ne mā quet ar mest ergier n'ho po quet aluzen

Souezet bras o velet n'an aveyen hini
Touez quen liez personnac'h a voa o rēn en ty,
Emeus me prest respontet : ententin va résón,
Me n'em don qet ama da glasquan aluzen.

Clasqa rān va c'herent quer er plaq mon bet gane
Al lec'h ma zodeo amān on bet maguet,
Lavarit din, me o ped, pelec'h eno c'havin.
Ne zelot netra q'en din evit va c'hon tantin.

An den ma a zo follet int commandet et crial,
N'en de qet mab d'hor mestr ni ret eo ar hasseal,
Guelet a piye neuzu eur vanden mevellin,
O tiredec gant bezier d'am c'hasseal souden.

O sortial gant glac'hār ha beuz et em daelou,
Da glasq va zud elec'h all pe clevet ô c'hélou,
En hent e zon bet scoët vel gant eun tol curun,
Pa meus me an aveet voa collet hor fortun.

Soudan o meus rancontret va c'hoar ar yaouanqa,
Eur zac'hic staguet outi, o c'houlen et bara,
O clasq compren ar malheur var n'ompi digueret,
Va speret zo bet troublet ha va c'halon mantrēt.

O Doue oll buissant roit din hoc'h assistanç,
Roit din an nerz da glévet penos ho Providang,
E deveus bet permettet, evit ma c'hastia,
Ma zompi bet reduiset er stad an herrupla.

Va c'hoaric paour, me ho ped, soulajit va miser,
Hast bras a neuze da glevet quélou deus va zad quér;

Hac eus ar vannic tener edeveus hor savet,
Mervel a rān en defot o zerc'hel ambrasset.

Siouas dit, va breuric paour, ne oufes qet compren
Peguen bras eo hor malheur, paguer bras hon a quen
Allas, ouspen hor madou, redomp divueret
Hor c'herent carantezus zo bet deom pravistet.

En despet d'allez ennoù grêt gan ar Republik.
Hon tad voa chomet fidet dan ilis catholique.
Rec se gant an tyranet ez eobet condaonet,
Da bignat var archaffot vit bez a dibennet.

Prestic goude hor madou zo bet confisquet,
Hac iye, prestic goude siouas int bet guerzet,
Consumet gant ar chagrin deus quement agollo
Hor maman a zo bet neuze scoet gant ar maro.

Cessit va c'hoar da baillant cessit d'am desoli,
Re a meus var an douar adourmant ac enni,
Eur moment ma c'hesperen commenç beva eus eur,
En em garvan oa Doue muyoc'h my malheureus.

Goude beza servichet ar Republik ingrat,
E deus d'am recompansi guillotinet va zad,
Laqet va mam da verret dre nerz an disesper,
Ha guerz et va oll vadou n'em bonovet miser.

Diouz an tourmanchou garo astourmous va speret,
Pelerc'h caout soulajement pelerc'h cavet remed,
Ar plarc'h e deus captivet a bel va zantiment,
A soulajo va hirvoud gant e c'homzou charmant.

Var zudy va mestrezic ezan gant esperanç
Caout en e fidelite remed euz va souffranc,
Bonjour derc'h va rouanes cetu mē deuter vro,
Ancouet eo va oll boanniu, mar am c'horit atao.

Mezo Fauchic he mignon distroeus ar bresel
Hac a so en pebamzer chommet et dechu fidet,
Demeus va oll garantez ebars en horc'h andret,
E meus brema esperanç beza recompance.

Petra paourquez renzen diclasquit-u en em c'hever,
Biscoas nemeus o quēlet na desirer ober.
Biscoas nem eus o caret n'o birviquen n'er gran,
Ha cets en ber gomzou o setanç diveza.

Me zo un den malheurus, ne gafet quet ebar,
Mil guel miliguet an heur m'ondeut var an douar.
Oll goulliou va c'halon zo nevédigoret,
O veza bed rebutet gant va mya caret.

Va mestrez ouz va guelet couez et en paourente,
Nijet et fromez saou nijet a c'harante,
Esperang va eurusted allaz zo tremenet,
Evet ma ra ure en noz dre hor speret.

An exempl ma tud yaouanq a deu doc'h instrui,
Peguen dister ar bed maleun a ingrateri,
Epad ma zoc'h pinvidic gant an oll oc'h caret,
Mes mar trod roud ar fortun adieu ar mignon,

Petra ran var an douar collet var mam va zad,
Va mestrez hava madou va brec'h da labourat,
O vervel pe o veva er c'hood gant al loënied
Rin guell eguet implori ama faus mignonet.

Er c'hoajou ante ialla otont d'en en guzat
Maguet vingant va glac'hār hac eus va daoulagat,
E tire do an daelou da dec'h va zec'bed,
Beted ar moment eurus ma quittainur bed.

En despet d'an injustiç a eprouvan hirio,
Me bedeo agreiz calon evit bonheur va brô,
O va doue deurvezit renta, dre ho puissanc
Ar bonheur al liberte d'am brô gues eus a Franc.